

Penedour Kala-goañv

*Vel evn an Ankoù 'pad an noz
An avel war ar menez koz
Neuze 'sav euz an douar-pri
An dud varo, e-mêz o zi¹*

N'eo ket sonet hanternoz c'hoazh pa vez gwelet un den o tont er-maez eus sal ar barrez. Sevel a ra e benn ha chom a ra ur pennadig da arvestiñ ouzh ar c'houmoul bras o redek en oabl, pak-dispak, skoach-diskoach al loar. Klouar-iskis eo an amzer evit ar c'houlz-bloaz, tost dinatur, mouest an aer, flour ha kreñv an avel war ar memes tro. Kerzhout a ra an den goustad war-zu traoñ ar parklec'h didud. Tennañ a ra un alc'hwez eus e c'hodell. Klik-klak, gouleier o vlinkañ. Erru tost ouzh ar c'harr e sell adarre ouzh ar c'hoabrennoù foll o nijal pelloc'h etrezek ar biz.

Emañ bremañ dirak ur Volvo V60. Treiñ a ra e selloù etrezek ar sal, e-lec'h m'emañ ar fest-noz o vont en-dro a-dro-jouiz. Akordeoñs, saxo ha trompilh o kas

1 Tennet eus *D'ar barzhed (sic) eus ar c'hreisteiz*, dastumad Annaick, gant Narcisse Quellien (1848-1902).

un ton doubl gavotenn, strakadeg treid an dañserien, youc'hadennoù da heul. Un hej d'e skoaz a ra an den, ha dres p'emañ o vont da zigeriñ an nor e kamm e fas hag e rank kemer harp war ar c'harr, e zorn war e vruched. Dispakañ a ra ar c'houmoul hag e c'heller gwelet tres an den : korfek, en tu all d'e zri-ugent vloaz, krenn e vent, puilh ar blev gwenn war e glopenn, barv gwenn touzet pizh. Gwisket gant ur parka brun cheuc'h hag ur stammenn c'hloan gell. Bragoù jeans ken cheuc'h all, en e dreid ur re votoù lâr melen. Neuz un den a beadra gantañ, tres unan skuizh gant ar vuhez war e zremm.

Alaniñ don a ra ha pignat er c'harr. Klevet a reer trouz mouget ar c'heflusker diesel mod nevez, ha kerkent son fraezh hag ampl muzik klasel o tont eus ur sono eus ar c'hentañ. Loc'hañ a ra goustadik etrezek ar bourk. Dres pa dremen dirak an iliz e son daouzek taol an hanternoz.

Treiñ a ra a-zehoù war-zu ar Fouilhez. Tra ma fraoñv ar c'harr a-hed an hent digenvez e teu e boan da wanaat hag e spered da habaskaat ouzh ar sonerezh barok. En oabl e red atav ar c'houmoul. Sellet a ra ouzh an daolenn niverel : 17 derez en diavaez. Nec'hus, a soñj an den, evit nozvezh kala-goañv.

Kala-goañv... Soñj a zeu dezhañ bremañ : an daou zen yaouank o flapañ ouzh taol-gont ar fest-noz. Eñ gant e vanne bier klouar, e-unan-penn, distag, o klask intent ster diviz an daou zen en o brezhoneg iskis dezhañ, eñ o poaniañ evit dastum bruzunoù ar yezh desket gantañ degadoù zo war barlenn e vamm ha dilezet goude. Estren ivez e bed an daou c'hant bennak a dud-se, bodet en-dro d'ur muzik ha da zañsoù ha n'int ket e re ken. Ha n'int ket bet e re gwech ebet, pa soñjer mat.

Just a-raok Kinoualc'h e tro a-zehoù war-zu Tredudon.

Chomet e oa ur pennadig mat da selaou an daou-se, hegaset gant an asur ma oant en o brezhoneg desket, an eil hir e vlev, gwir relegenn eus ar *sixties*, en doa soñjet, poncho, dreadlocks hag all, egile un denig prop warnañ gant un tamm barv berr, neuz ur c'helenner gantañ. Gwarizius ouzh ar birvilh a oa gant o c'haoz, ouzh an entan en o daoulagad, ouzh o yaouankiz, hag int o kontañ eus kala-goañv hag ar mojennoù tro-dro d'ar gouel, penaos e c'helle kemmeskañ bed ar re vev hag hini ar re varv en nozvezh hud-se. Nozvezh kala-goañv. Heklev dispis traoù bet klevet gantañ ez-yaouank.

Setu bremañ dirazañ peul ar Roc'h Tredudon, mesaer al lanneier kudennek marellet amañ hag ahont gant koadigoù sitka. Strafuilhet eo bet muioc'h eget n'en dije karet gant komzoù an daou gañfard, evel pa vije darev teuzoù ha seblantoù ha tasmantoù da zifoupañ eus pep korn an douaroù garv en-dro dezhañ. Tremen a ra hebiou hent ar Gwenidoù, a zegas dezhañ eñvorennoù istorioù skrijus klevet-diglevet gantañ gwechall, penaos e oa bet lazhet ha beziet war al lec'h daou ofiser alaman, o c'hezeg da heul, hag an tav war pep tra... An tav... Evel en e familh...

Goude bezañ chomet ul lajadig etre daou e kemer an hent kozh a-zehoù. Un hent strizh, dider eo, leun a doulloù, ha rankout a ra bremañ teurel evezh bras. A-daol-trumm, goude ur pleg, ez eo dallet gant gouleier uhel ur c'harr hag e rank chom a-sav, stok ouzh ar c'hleuz, evit mirout a dosañ an oto. Chom a ra ur pennad mat o tialaniñ,

dourc’hwez-tout. Hag ar pistig flemmus o tont en-dro en e gostezennoù. Ha ma rankfe chom sac’het amañ, war lein ar menez gouez, e-kreiz nozvezh kala-goañv ?

En ur grenañ e teu a-benn da loc’hañ en-dro : ma c’hell tapout ar Releg ne chomo dezhañ nemet pignat gant an hent serzh a gas da Gerguz, hag er gêr. En tiig prenet gantañ daou vloaz zo, el lec’h-repu ma vez en e-unan o chom. Ret eo lakaat da holl nerzh evit tizhout ar pal, a soñj an den.

Goude ar groaz dispennet e ruilh difonn hebiou ur c’hoad sapin, ha kregiñ gant an diskenn. Petra a chom din c’hoazh, a soñj, ul lev bennak marteze ? Dav derc’hel penn, va faotr, emezañ dezhañ e-unan, dav mont betek penn, kousto pe gousto. Koulskoude e sant e gorf a-bezh aloubet gant ur skuizhder divent, hag ar pistig en e galon o tont en-dro adarre, flemmusoc’h c’hoazh, tra ma tasson en-dro dezhañ pozioù al lied seblantus :

*Komm, süßer Tod, komm selge Ruh !
Komm führe mich in Friede,
weil ich der Welt bin müde...*²

Diskenn, mont pelloc’h, padout, padout, mont betek penn, emezañ a vouezh uhel, gleb-teil e roched gant ar c’hwezenn, a ruilh war e dal hag e zremm.

N’hell ket padout ken gant ar boan lemm. Sonnet eo gant ar spont, dic’houest e empenn da c’houarn e izili.

2 Deus, marv c’hwek / Deus diskuizh benniget / Deus
d’am c’has d’ar peoc’h / Rak skuizh gant ar bed on.

Santout a ra ur stroñsadenn pa sank rodoù a-raok ar Volvo en doufflez, ha mont a-benn ar c’hleuz izel. Stekiñ a ra e benn ouzh ar rod-stur, gouleier ar c’harr o sklêrijennañ an draoñienn ledan, didrouz, diseblant ha didruez.

Ha bepred son kañvaouüs Johann Sebastian Bach :

*Ach komm ! ich wart auf dich,
Komm bald und führe mich,
Drück mir die Augen zu.
Komm, selge Ruh !³*

*

* *

C’hwezhañ a ra bepred an avel glouar dindan damc’houlou al loar. Pa selaouer mat e klever trouzoù lies an noz : galv ur gaouenn war lein begoù sklent lemm ar menez, piltrot loened bihan er brouskoadoù, huanadenn an avel en draoñienn, o kribañ difaezhus ar brug hag al lann. Er pellder e vez spurmantet skleur kêr Vontroulez.

Dianket-naet e sav an den e benn. Divorfilañ a ra tamm-ha-tamm ha sellet a ra en-dro dezhañ. Habaskaet eo ar boan en e vruched, ne chom nemet ar faezhded ken terrubl-se. A-dastorn e kav an alc’hwez, ha lazhañ ar c’heflusker, ar muzik hag ar gouleier. Herrek e filbouch er voest manegoù, tapout krog en ur voest pilulennoù hag ur voutailhadig dour, ha lonkañ buan-buan daou gached.

3 Deus ’ta ! Da c’hortoz a ran / Deus buan d’am c’has ganez / Serr din ma daoulagad / Deus, diskuizh benniget.

Gant al loar o tispakañ e teu a-benn d'en em reteriñ. Dont a ra da soñj dezhañ bremañ darvoudoù an noz : ar fest-noz e Berrien, komzoù an daou baotr yaouank, an hent digenvez, ar waskenn, an oto aet er fos... Gant mil boan e teu a-benn d'en em sachañ diouzh ar c'harr. En ur vranisigellat war e zivesker e sell ouzh an ardremez endro dezhañ : daoust ha n'eo ket tour abati ar Releg a vez spurmantet en traoñ ? Hag ar Peglem du-hont, war e du dehoù ? Hag un tu bennak izeloc'h e tle bezañ Feunteun an Tri Eskopti !

Sonnet gant an aon e furch er parka war-lerc'h e bellgomzer hezoug. Pelec'h an diaoul emañ ? Tribledie, komañs a ra e galon da dalmat foll. Sioul, eme ur vouezh en e benn, da betra servij, piv gervel, paotr paour, n'anavez den ebet ken dre amañ, hag en noz-mañ emañ an urjañsoù leun a vevhierien gwallc'hloazet, a speredoù dianket, ha pegeit amzer a-raok ma teufent betek amañ ?

Sioul, sioul, va den, ne vefe nemet diskenn war da bouezig gant an hent-mañ d'ober... Ha goude 'vo gwelet. Ne varvi ket gant ar yenijenn fenozh, nann, nann. Hag en da vro emaut, a-benn ar fin, ket ?

Kregiñ a ra da vale goustadik etrezek an traoñ pa wel war e du kleiz ur wenodenn a sko war-zu an nec'h. Paouez a ra an den ur pennadig, en entremar. Ur sell war e oto diflach o lugerniñ dindan skinoù al loar, ha sevel a ra gant an hentig, evel sachet gant ur maen-touch. Serzh eo ar savenn ha ruilhal a ra mein bihan dindan e votoù re cheuc'h. Daoust d'an dialanet ha skuizh marv m'eo an den ez a pennek war-raok, evel pa vefe ur redi dezhañ tizhout penn ar ravent.

Dre ur gloued houarn dihailhet e tremen, ha toullañ e hent dre ar raden sec'h hag an drez aloubet ar wenodenn ganto. Klevet e vez trouz alan berr ha mallozhioù mouget an den pa strebot ouzh mein an hent pe pa grog an drez en e barka. Pignat a ra an hentig a-raok tizhout ur gompenezennig etre div voger mein glas uhel.

E-touez ar geot gouez hag an drez e spurmanter roudennoù houarn, warno ur vagonig dirapar merglet-holl.

En em gavet on, a huanad an den, beuzet en e c'hwezenn, rentet gant ar strivoù graet gantañ. En em gavet on.

Rankout a ra gourveziñ war ur gwele mein-glas drailhet. Evel-se e chom ur pennad mat o klask gorrekaat lusk e galon, oc'h arvestiñ ouzh an oabl m'emañ ar c'hoabrennoù o kenderc'hel gant o redadeg foll.

Erru eo, evel dre un taol hud, en em gavet eo el lec'h m'eo bet o klask, hep gouzout dezhañ, abaoe an daou vloaz m'eo deuet en-dro d'e vro.

Tamm-ha-tamm e sioula e alan, tamm-ha-tamm e nij an enkreiz dioutañ. Tamm-ha-tamm e teu da santout flouradenn an avel glouar war e zremm, hillig ar geot dindan e zorn, an tapis mein bihan drailhet ouzh e gein, kalet ha klet war un dro, trouz un oto er pellder, war-zu ar Roc'h Tredudon.

Peoc'h e klouarded madelezhus an noz.

Noz kala-goañv eo, a zeu da soñj dezhañ.

Kala-goañv...

A-daol-trumm e vez freget sioulded an noz gant ur galv spouronus, a lak anezhañ da dridal : ur gaouenn eo, a zle bezañ tost-tre, war lein ar voger sklent. Gervel a ra en-dro an evn-noz.

I heard the owl call my name..., a hiboud an den.
I heard the owl call my name, emezañ en-dro.

Galv evn an Ankoù...

Boull e teu an oabl da vezañ hag a-daol-trumm e vez sklêrijennet splann al lec'h digenvez : aze emañ ar vagonig war ar roudennoù diframmet a gas d'un toull teñval diwel dezhañ, ha pelloc'h, war an tu kleiz, ul logellig graet gant daroù sklent bras lakaet en o sav, toull he zoenn, tammoù balan chomet a-ispilh outi.

Dav dezhañ mont, dav dezhañ sevel... dav dezhañ tizhout al lochig.

Hopal a ra ar gaouenn en-dro, div wech... teir gwech.

En em harpañ a ra an den war e ilinoù ha tapout krog en un dreujenn valan. Kregiñ a ra da sevel pa deu al lamm-kalon foll adarre, ar pistig euzhus. Adkouezhañ a ra war e gein. Klask a ra mestroniañ e holl nerzh evit sevel en-dro. En aner... Rankout a ra chom war e wele bruzun sklent.

Ha galv kudennek an hoper-noz dre ar menez hag al lanneier.

Klevet a ra an den trouz ur c'harr o tont eus lein ar menez, e c'houleier o skubañ ar ganienn ledan. Nebeut amzer goude e klev trouz dorioù o stlakai, mouezh mezviet daou zen o tregerniñ hep na c'hellfe intent poz, c'hoarzhadenn unan anezho ha sarac'h troazh egile war ar raden. Pegen pell emaint ? Un tri c'hant metr bennak ?

Klask a ra an den huchal, met trouz ebet ne zeu diouzh e gorzailhenn.

Emañ dija ar c'harr o pellaat...

Rentet-divi eo bremañ, berroc'h-berr e alan, e galon faezh o vont en-dro a-stroñsadennoù e klouarded ar bed krin. Klask a ra kempouezañ e alan. Sellet a ra ouzh an oabl ma teu stankoc'h-stank ar c'houmoul ennañ.

Degemer mat em bro, a seblant krial ar gaouenn.

Galvet he deus, galvet on ganti, a soñj an den. Stourm ne dalvezo da netra ken...

Al logellig, ar vagonig... ar poull don... ar sklent...

Na pegen kuñv an hunvre... an distrafuilh... an diskuizh... ar c'houk don.

Ar c'hevrin... ken tost d'ar wirionez... ken tost...

Deus... deus ganin war hent an diboan, a hiboud ar gaouenn e pleg e skouarn... Hiboud evn an Ankoù...

*Komm bald und führe mich,
drück mir die Augen zu.
Komm, selge Ruh !*

*

* *

Nijet eo kuit eo ar c'houmoul tev, lugerniñ a ra ar stered en oabl boull. En noz e klever trouz divaskell bagol un evn-noz o tistokañ. Sevel a ra, treiñ teir gwech en-dro d'ar vengleuz ha bukañ etrezek ar flondrenn ledan a ziskenn betek an abati.

Didrouz eo bremañ e nijadenn en aer glouar, izel,

izel etre diribin frank ar ganienn, evel etre divorzhed degemerus ur vaouez. Ha plavañ dindan skleur al loar, dibres, peoc’hus, meurdezus...

Spis e wel an den aet da evn kement tosennig, kement bod lann pe haleg, houlenn ar geot-hesk, mantell ar raden disec’het pladet d’an douar, kribenn ar menez ha beg tour an abati en traoñ, ur siminal o tivogediñ ’kostez ar Chaoser. Un nijadenn dibouez, divoud, seder, a c’hellfe, a rankfe padout da viken. Spisoc’h c’hoazh e teu dezhañ holl drouzoù ar maezioù didud : sarac’h an avel en haleg dizeil, frañvadenn ur c’harr-nij uhel en oabl, strakadennig ur brankig brug dindan treid ur c’had, blejadenn ur vuoc’h un tu bennak en traoñ, harzhadenn ur c’hi war lein Kerguz, richan ur wazhig dour c’hwezhet gant dourioù Here. Trouzioù an natur, natur ha buhez e vro adkavet, ganto blaz un degemer c’hwek d’ar mab foran, d’ar penedour Kala-goañv diskennet warnañ ar sederded hirgortozet, dilezet gantañ e relegoù den evit antreal en ur ren all.

O plavañ emaint bremañ a-us Feunteun an Tri Eskopti, ar poull m’en em gave gwechall bep bloaz eskibien Leon, Treger ha Kerne evit breutaat diwar-benn aferioù ar vro. Istorioù klevet alies gantañ, koñchennoù n’en doa ket taolet trawalc’h a bled outo e spered trubuilhet. Keuz ? N’eus lec’h ebet evit traoù evel keuz, kerse na moc’hed en e ved nevez. Nag evit ar pezh a anver “soñjoù” e rouantelezh Mab-den.

Darnijal a ra an evn ur pennadig en-dro d’ur poullig ront kelc’hiet gant gwezennigoù haleg tort ha bodoù hesk. Daoust ha spurmantet en deus tri den gwisket mod